

LOUARINIG

Niverenn 2



Ar vikinged



Klask an aour



Kontadenn Nordahl

Ar potamocheder

E don
koadeier
kehederel
Afrika
e vev loened
suezhus,
ar
potamocheder



Al loened-se, hir o fri, zo eus kerentiad ar *Suideae*. Er c'herentiad-se e kaver ivez o c'hendirvi afrikan, ar fakochered, pe ar moc'h hag ar moc'h-gouez eus du-mañ.



Ur potamocheder deuet d'e vent a ya betek 75 santimetr uhelder ha 1,40 metr hirder. Ar re vrasañ a bouez betek 90 kilo hag a c'hall bevañ 15 vloaz.

Hervez al lec'h a vevont ennañ e c'hall o liv bezañ disheñvel. Peurliesañ e vez rous o c'hreoñ, gant un tarch gwenn hir war o c'hein. O moj zo moan ha du en o beg.

Heverk eo ar potamocheder dre stumm o divskouarn. Ar re-se end-eeun zo blevennoù gwenn hir en o fenn. A-hent-all e reer anezho ivez : « Potamocheder o barr-livañ »

Anneziñ a reont holl e lodennoù koadek Afrika ar c'hornôg. Kavout a reer anezho ivez er savanennoù ha, dreist-holl, el lodennoù geunek anezho ma plij dezho mont da soubañ o c'horf er fank.

Hollzebrerien zo anezho, debriñ a reont frouezh kouezhet war al leur, gwrizioù ha dreist-holl torzhelloù a zizouaront o turiañ an douar gant o moj. A-wezhioù e tebront preñved amprevaned, mellkeineged bihan ha naered zoken.

Bevañ a reont a strolladoù 5 pe 15 loen, dindan veli ur par bras, evel ar moc'h-gouez.

Evit echuiñ, plijout a ra kalz al loened-se da dud ar vro a hemolc'h anezho evit o c'hig. Kroget eo tud zo da zesevel anezho evit se, zoken.



Bale a reont diouzh an deiz pa vezont gwarezet gant ar c'hoad, ha diouzh an noz pa n'en em santont ket ken e savete. Bronneged eo ar potamocheder. Klodañ* a ra ur barez eus 3 betek 6 a re vihan goude bezañ douget anezho e-pad pevar miz.

(*) Klodañ, ur pemoc'h bihan : lakaat ur pemoc'h bihan da zont er bed.

